



MIZ C'HOUEVRER 1922

TOLEN AR MIZ

Galvaden	E. A. M.
En eur botou koat	J. C.
Eur gontaden	Gab LISKILDREY.
I'en da-ben al linen	Potr JULUEN.
Ar pezh a zonjer	E. KEROU.
D'eur vere'hig	DIR NA-DOR.
Paner burzudus ar me- vel Fanch	E. NIG-ARVOR.

GALVADEN

Mar klaskfen ervad, e kavfen c'hoaz diou dousen ane, koz ha yaouank, ar re a douge ar bluen, arôk ar brezel, da skrivan brezoneg, hag ar re o deus kroget enni aboue, evit ar wech kentan !

Ya, pevar war-n-ugent skrivagner a gavfen c'hoaz e Treger hag e Kerne, daoust da lod eus ar re wellan da vezan bet skoet gant Ankou ar brezel. Pevar war-n-ugent ! Hag a dra zur, n'o deus ket paouezet da skrivan ; da voullan ne lavaran ket. Du-ze, er gêr, pa zav diwar ar vue pemdiek eur mennoz bennak hag a lak ar galon da domman, kerkent ar spered a grog ive da labourat, hag evel ar chascour, pa lavare :

Tap d'in ma fuzuilh ma rin eun dro chase,

ar skrivagner a lavar ive :

Tap d'in ma fluen ma rin eur zôn neve.

Ar « zoniou neve-ze, » avat, petra deuont da vezan ? Daoust hag ar barz an eus savet ane evitan hepken ? Pec'hed a vefe ; ar barz a zav gwerz pe zôn, marvailh, danevel pe istor, hag a zerr ane goude klenk ha kloz en e bres, da betra dalvez int bet savet ?

N'eo ket awalc'h-skrivan, red eo moullan !

Arvorig a zo digor evel biskoaz da skrivagnerien Treger ha Kerne, evel m'eo *Feiz ha Breiz* digor da skrivagnerien Leon.

Dija, meur a hini o deus adkroget da vat en o fluen ha n'eo ket trugare a lavaromp d'ê, mil bennoz Doue 'n hini eo !

Hepdale, herve ar vrud, e kresko an niver ane. *Arvorig*, mar gall tapout lennerien diouz m'he devo skrivagnerien, a gresko ive niver he fajennou....

Evit Doue eo e labouromp da gentan ; evit Breiz e labouromp ive.... Pïou na deufe war hon zikour !

E. A. M.

En eur Botou Koat...

D'ar vugale a lenn ARVORIG

... Demdost d'eur voure'h eus hon bro, eun tammik dizro diwar an hent, kuzet gant eur bodadig gwez, e kaved eun tiig bihan soul. Ennan e oa o chom gant he bugel dek vloaz, eur potrig ar c'hoanta, eun intanvez. Kollet ganti abred he fried, ar vamm gla-c'haret ne vevs ken nemet evit he bugelig he devoa distôlet warnan he holl garante. Heman ive a gare e vamm a greiz e galon hag a glaske bepred an tu d'ober d'ezi plijadur.

Dere'hent Nedeleg edo... An erc'h a gouee hep paouez hag a rê eus ar meaziou eur gompezen from-mus. An tiig a oa evel kuzet dindan eur vantel wenn ha, diouz ar pardaez, paneved ar vogeden a zave eus ar siminal, den nije sonjet edo el lochen-ze daou grouadur kristen.

Pell a oa, ar bugel an evoa goulennet monet er blaz d'ar Pelgent. Ar vamm a aotreas ha setu e chomjont goude o c'hoan da varvailhat o koun an oaled, elec'h e tève ar c'hef Nedeleg. Komz a reant, evel just, eus an darvoud a c'hoarvezas e kraouig dister Betleem... Jezus a oa paour eyeltê ha koulskoude e oa Doue.

A greiz oll, ar bugel a zavas en e zav hag a laras d'e vamm :

— Me a ya da lakat ma botou en oaled, rak henoz e teüio ar Mabig Jezus d'hor gwelet.

— Pïou an eus laret d'it kement-se ?

— En deiz-all, er c'hatekiz, an O. Kure a laras evel-hen : « Disadorn da noz, beilh Nedeleg, lakait ho potioù en oaled ha mar doe'h bugale far, ar Mabig Jezus a gaso d'ec'h ho kouignaoua. » Dec'h e kavis anean war an hent hag e laras d'in : « Ac'hanta, Perig, ha sonjal a rez e teüio ar Mabig Jezus du-ze vare'hoaz ? — Oh ! O. Kure, a respontis d'ezan, marteze ne ya nemet da di ar re binyk ha me a zo paour. — « Bez dinnee'h, ma fôtrig, emezan, mont a ra koulz da di ar re baour, rak o c'harout a ra a greiz e galon. Laka da votou en oaled hag e vezo gwelet... » — Petra livirit a gement-se, mamm ?

— Mat ! mat ! o laka, mar kerez, ha mar d'out bet fur, marteze e teüio ar Mabig Jezus.

Perig a lakas e votou ha breman, gant mall bras, e c'hortoze eur an oferen. C'hoaz eun eur... eun hanter-

eur... Poent eo !... Setu int en hent... Prestik edont arru rak n'oa doa ket pell da ober.

Klevet hon deus an O. Kure o komz ouz Perig. Ma komze evelse outan, n'oa ket a dra zur, hep eur zonz kuzet. Pell a oa e tôle evez ouz ar bugel ha muioc'h-mui e plije d'ezan. Bepred da gentan er skol hag ive en iliz, e ouie hep tro ar gwellan e gentel katekiz. Alies e vije gwelet daoulinet dirak ar Zakramant o pedi kalonek. An holl e gare hag a lare anezan : Henez a zo eur pôtrig mat. — An O. Kure a ouie an treoze holl hag alies e sonje petra e c'hellje ober eus Perig...

En noz Nedeleg, e ouie e teuje gant e vamm d'ar Pelgent hag e c'hortoze ane. P'o gwelas o tont en iliz, e sellas e vontr : « C'hoaz eur c'hart- eur... Amzer am eus. » Mont a reas buhan ermêz; kemer a reas an hent a gase d'an tiig soul... An ale'houez a vije lôsket dalc'h-mad war ar prenestr, ha setu hen en ti... En oaled, sklerijennet gant tan ar c'hef, e oa botou Perig. Lakat a reas enne eur pakadig bihan... D'ar red e tistroas d'an iliz, eürus-eus ar pez an evoa grêt. Kerkent e sonas er c'hloc'hdi daouzek töl an hanter-noz hag en iliz e tregernas an « Te Deum »...

..

— Oh ! pegen kaer eo oferen ar Mabig Jezus ! a lavare Perig d'e vam en eur dizrei d'ar gêr. Ni zo bet o welet anezan ; daoust ha bet e vo du-man ?

Ar nor digoret, ar vamm a enaouas ar golo. Kerkent ar pôtrig a loskas eur skrijaden :

— Mamm, mamm ! Bet eo ! Bet eo ! Oh ! pebez leor kaer ! Eul leor oferen ! Sell ! c'hoaz zo eun dra ben-nak !... Eul lizer eo !

Buan e oe digoret hag ar bugel a lennas ar geriou-man : « Chom bepred eur bugel mat ha bez fur, rak c'hoant am eus e vefes beleg. »

O-daou e chomjont sebezet ha dilavar eur pennadig. Ar pôtrig a gomzas da gentan :

— Oh ! mamm, emezan, fenez, goude an oferen, dirak kraou ar Mabig Jezus, me am eus klevet ar c'homzou-ze c'hoaz !

Ar vamm strafilhet ne ouie petra da zonzjal. Epad ma rê he mabig hunvreou dudius, en em lakas da bedi kalonek. He c'halon a ranne o sonjal en disparti a c'hellje bean eun de etre he mab ha hi, hag e c'houlenne norz ha sklerijen. Pa zavas, e oa frealzet ha krenvaet gant he feden hag evel gwechall ar Wer-

c'hez Vari, pa zigemennas d'ezi an el an treo büzudus a dlee en em ober drezi, e lavas d'he zro : « Ma Doue, ra vo grêt ho polante ! »

D'ar mintin, arök an oferen-bred, ar vamm krog en dorn he bugel a skoe war dor ar presbital. An O. Kure a oa ouz o gortoz. Goude eur gözeaden hirr, an intañvez leun he daoulagad a zaerou, met daerou a levenez kentoc'h eget a dristidigez, a laras d'ar beleg : « Doue a zeblant her goulen ! Setu hen aman ; grêt dioutan eur veleg mat ! »

Perig laouen a zeskas neuze al latin. Kaset e oe prestik d'ar c'helendi, ac'hane d'ar c'hloerdi ha goude e oe unan eus gwellan beleien hon bro Breiz-Izel.

Setu aze eun istor, bugale. Oh ! ra zeuio ar Mabig Jezus da c'hervel evelse kalz ac'hanoc'h ! Ra blijjo gantan ive rei d'an holl gerent kristen norz-kalon an intañvez-man.

J. C.

EUR GONTADEN

Mamm-goz, pa oan war he barlen,
A laras d'in eur gontaden
Dec'h da noz. — Ken brao he c'hevan,
Ma 'm eus c'hoant braz d'he displegan. —

..

Eur wech a oe, — pegoulz, p'elec'h ? —
Me, avad, n'oufen larot d'ec'h, —
Eur pôtrig seder, hegarad,
Moumounet-dreist gant mamm ha tad,
Nemet oa nammet ar bugel,
Hag e kerze war diou vrasell
Na oa 'vit bragal na c'hevari,
Oh ! nag e blanedon 'oa kri !
Eun deiz ma selle dirzau
Bugale-all o farletan,

Eur paourig-koz, n' belle mui ken,
Deu da zemplan en o c'hichen....
E dreid a wad, krenan a ra :
« Oh ! roet d'in eun tamm bara,
Krouadurien, en han' Doué,
Pe tec'hout kwit 'ra ma bue ! »
True outan ho pije bet ;
Ar grennarded-man n'o deus ket.
Eur galon loen 'zo en o c'hreiz,
Seurt-se n'int ket ganet e Breiz !
C'hoarzin goap war ar paour 'reont
Ha leuskel komjou divergont :
« Tec'h alese, truant an diaoul,
Pe ni ya d'az stlepel er poul ! »
'N eun tól, neuze, ar c'hézig kamm
Ewar e diou vranell a lamm.
Hebdale 'man, n'oun ket penoz,
War e zaoulin dirag ar c'hoz.
En e c'hodel eur c'houign bara,
Ebarz dorn ar paour hen laka....
Raktal c'hoarveas, 'me mamm goz,
Eur burzud 'oad ket o c'hortoz :
Ar c'hasker-boed 'lez da gouezan
An druilhous zo ouz e wiskan ;
En e dro ' luc'h eur sklerijen
Larfec'h groet gant kant stereden,
Hag eur c'hoarz war e vuzellou
Seurt na gaver 'met en nenvou,
E zorn lak war benn ar bugel,
Ha gant eur vouez dous 'vel ar mel :
« Ma fôtrig mad, da galon aour
He deus bet truez ouz ar paour ;
Ma bennoz-Doue d'it 'roan,
Na gammi ken diwar vremen ! »

* *

Chetu an istor a g'evis
Dec'h da noz, ha 'm eus dalc'het piz ;
Kement braoig 'm eus a rofen
Evit goût e pe bilajen

Eman ar c'hoziad-man o chom ;
Ma c'heloun outan zo ken tomm,
Ha d'ean me garfe poket,
Mes mamm-goz, emei, na oar ket.

GAB. LISKILDRY.

(Tennet eus son c'hallek an Itron Sophie Hue.)

PEN-DA-BEN AL LINEN

II. — An Neve-amzer

Warlerc'h eur gouanv du, kri hag hurr ha padus,
Setu 'n neve-amzer 'us d'imp breman distro ;
Dindan ar skorn, an ere'h hon mouez a oa klemmus,
Breman c'hoaz eur pennad, ni c'hoaz a c'houistello !

Evel al lapoused neveet o mouezion,
A richan beure mat war o brankig pintet,
Ni a garje kanan, vel gwechall hon zadou,
Hon gwerzcion meurbed kaer, en hon Breiz ken brudet

Evel an holl méziou, en perlez bep beure,
Ni garje gwech pe wech gwiskan hon dilhad kaer,
Evit mont, war eun dro, d'ober eun tam bale,
E disheol an deliou, da gaout bere hon amzer. .

Mes dalc'hma ! 'n h-m spered hirie ken trubuilhet
E chom hep mont ermèz, ar zonz eus ar brezel,
Ar zonz eus ar marviou, eus an holl dud lizet,
Gwallet pe mac'hagnet ken pell diouz Breiz-Izel.

Pebez gwall eur garo eo hirie hon hini,
Ar walen hon dalc'h keitpell, siouaz, diouz ar gêr ;
Evit he anveout, reaker bevan ganti,
He zamman 'hed an de, vit zantout he fouez ler.

Ra deuiio ar viktor, gant hon re goneet ;
Ha, war e hed, ar peuc'h, da ren a-us d'hon bro,
Hag eur wech c'hoaz distro, ar brezel achuet,
E pevar c'horn hon Breiz, seven ni a gano :

Setu an amzer vras a larre en hon bro ;
Gantan ar joausted a ren er c'halono ;
Bean vo peurbadus mar fell d'imp'n em glevet
Vit dere'hel sounn dre oll ar Gwir, al Lealded !

Arras, miz mae 1915

POTR JULUEN.

Ar pez a zonjer

'Dalek 'c'houezas ar brezel bras,
Frans he bugale a c'halvas ;
Ouz he mouez an holl a zentas.

Ar Vretoned o partial
Vije klevet holl o youc'hal ;
Da Verlin !... 'me, 'n eur chaseal !

Da Verlin, da welet Gwilhaou !
Lakomp e benn da krec'h d'an traou !
Greomp d'ar Gwir trec'hi ar Gaou !

Fellout ra d'ar « Bochi » gaouiad
Lonka hon bro 'n eur c'hinaouad...
Moan ha treut eo bet he c'hovad !

Dle eo he deus d'imp da baean ;
Paean rei ?... Barz pegeit aman ?
Ha c'hoaz nebeut, nebeut kenan !

Ha koulskoude eo bet trec'het ;
He soudarded o doa pleget ;
Sinet ganti e oa dornet.

Soudarded Frans deuas d'ar gêr,
Laouen, o c'halonou seder,
Bet d'e an trec'h, grêt o dever.

Achu 'r brezel, sinet ar peuc'h ;
Setu laket an nask d'ar veuc'h...
'M eus aon, he goro a zo teuc'h !

Diès eo goro ar vioc'h koz ;
Ro ket he leaz... ha piou zo kaoz,
Mar n'eo ket Lloyd a Vro-Zaoz ?

— Da Verlin ! 'me ar Vretoned ;
Ha mar bije oute sentet,
Ar vioc'h pell zo 'oa gorroet !

Neuze Frans ne oa ket hirie
O c'hortoz aour... ya, marteze !
O kreski 'n truachou bemde !

Bemde klever, 'boue tri bloa so,
An diskan-mân : 'R Boch a baeo ! —
Trawalc'h, trawalc'h a seurt kôjo !

Sonjal rer penôs « Aristid », (1)
'Benn kêr aour, renko mont da vit,
Ha nan kontañ re war Lloyd !

E. KEROU.

(Eil priz « *Unvaniez Arvor* » gouere 1921).

D'eur verc'hig ganet de ouel ar Rouane

WAR DON : *Ar vualc'hig*.

A gêr Sant Erwan Breiz-Izel,
— Gwareg e di 'us d'az kavel, —
Armella, te zo ginidik ;
Nag evurus ec'h out, merc'hik !

Da zant Erwan out filhorez,
Ha d'az tud, te zo « Rouanez »,
Rak gant kurunen war da benn,
Out diskennet en hon zraouien.

(1) Ha breman *Poincaré*.

« Rouanezig » koant Armella,
Arabad vezo d'it gouela,
Rak ar blaneden 'zo dispar
A deu ganit war an douar.

Vel da dad te « garo da vro, »
— Ar varzed 'veltan zo tano, —
Maget gant leaz eur vamm seder,
Te vo perlezen Bro-Dreger.

Armella, te a dougo pell,
Brud vad merc'hed fur Breiz-Izel,
Kea war rôk ha bale timad,
Savet out eus eur wrizien vad

Da dad koz a oa labourer,
Ganet e parrouz Lanneber,
Te, merc'hig, a zo deut e kêr,
Brao eo d'it, da dad zo noter.

Evit jachan da dam brifen,
'Renki ket ober pinijen,
Mont pell da gas da zaout da véz,
Da « bark an aman hag al lèz » ;

Bale diere'hen en henc'hôr,
Pe gant botou toull awechou,
Ha, forz dindan pesort amzer,
Deski gant poan eur gwall-vicher.

Bennoz warnout p'out ganet mad,
Bennoz d'az mamm, bennoz d'az tad,
Ac'h ep, dre da c'hinivelez,
Karget a joa o ziegez.

DIR NA-DOR.

*Kinnig a reomp, gant hon « digemer mad » d'o mer-
c'hig, hon gwella gourc'hemennoù d'an tad ha d'ar vamm,
an O. Even, noter e Landreger, hag an Itron e bried.*



Bepred leal e pep tra

Paner burzudus ar mevel Fanch

Pezig-c'hoari deverrus 'n eun arvest

GANT

EVNIG-ARVOR

Kentskrid

Da Ujen, Loik ha Perik Caurel (1)

D'ac'h, ma lutuned bilhan, ha d'ho holl genvroiz a zarempred
ar skolioù a yez vrezoneg, e kinnigan ar pezig-c'hoari-man.

Ar steuen anean a zo eun danevel koz-koz, a lenner er skri-
dou arab, anavezet dindan an hano gallek « Les Contes des
mille une nuits ». Pa 'z eo bet troet ar marvailhoù arab-ze e
gallek, ar vistri-skol o deus kutuilhet diwarne meur a zane-
vel 'vit ar vugale. An hini ane a dalv da ziaze da **Baner burzu-
dus ar Mevel Fanch** a zo bet troet e brezoneg 'vit pôtreidigou
ha merc'hedigou Breiz gant Hoël ar Skos, hag embannet en
unan eus niverennoù **Feiz ha Breiz**, en hevelep doare :

BARN AR C'HAVRIG

*Eun arabiad a ioa bet laëret gant unan pe unan eus tud e dt.
Dastum a eure raktal e vevelien da dremen barn ar c'havrig :
an hini en deus great an taol, emezan, dioc'htu ma toucho ouz
kein va gavrig a vezo duet e zourn d'ezan. Peb hini, d'e dro, a
dremen eta dindan eun tell tenval, tenval. P'en em gavont er meaz,
e tiskouezont holl o daouarn : du oant nemet re unan ; henman
n'en devoa ket kredet touch ouz ar c'havrig. « Te eo az peuz
great an taol », eme an arabiad, laouen da veza kouezet war
al laër. An arabiad en devoa duet kein an anevad gant glaou-
douar, hervez an istor, rag n'eo ket kalz anavezet ar glaou-douar
en Arabi.*

(Hoël ar Skos).

Pa oan c'hoaz bilhanik, er skol, am eus sonj da vean gwelet
c'hoari eur pezh gallek hag a oa an eienen anean ive en hevelep
danevel. An traoù-ze a lakas em spered skrivan **Paner burzu-
dus ar Mevel Fanch**. Pemp bloaz war-n-ugent zo abous am eus
hen skrivet ha lakeet hen c'hoari 'vit ar wech kentan. E c'hoarie-
rien 'vije bet breman tud en o brud ; nan int ken, an darn-vuan
ane : fale'het int gant ar maro, er Brezel bras ! Daou eus ar sko-
lerien ger-ze a fell d'in lakât o hano aman ; **Per-Mari ar C'hoari**,
an hini re ar eontre, ha **Jul Derrien**, an hini a laëre ar chaden

(1) Ar pezig-c'hoari-man, graet 'vit ar bôired vihan, a zo brao
hen lakât c'hoari gant ar merc'hedigou ; neubent a dra zo
d'ober 'vit ze ; mes en eur dibab an hanotou, diwall da gemer re
ha nan int ket breizad !

aour; sonj am eus gant pebez kalon e lare al laër bihan, 'n eur strinkan d'an daoulin: « Pardon, ma eontr, pardon! »

O vean na chom ken **Paner burzudus** ebet er vouterezh, zo bet goulennet diganin lakât hen admoullan, evidoc'h, bugaligou Breiz-Izel. Setu am eus graet eun tammig kempenn d'ar pezig-c'hoari, hag hen hirraet ive arôk hen kas dirakoc'h. Hen digemeret eta, hen lennet hag hen c'hoariet 'vit ho teverrât. Ra ho kentelio ive! Diskit karet hanofou bâdeziant hon bro, hanofou ken koant! Roit an hanofou-ze d'ho fillhored pa vefet galvet da hanva eur bugel; dreist-oll, diskit bean gwir Vretoned dre ho pue; ra vo ho ker-reolen an hini a ro O. Kerlan d'e nizien:

« Bepred leal e pep tra ! »

E. A.

Lac'harena, 7vêt a viz Kerzu, 1921.

TUD AR C'HOARI

Ervoan, aotrou Kerlan.	60	vloaz
Ar Guidet, mignon aotrou Kerlan.	45	—
Tro-neur	13	—
Gwenole } d'ean eur vouez flour hasklintin.	12	—
Briag }	12	—
Alan } nled da aotrou Kerlan.	11	—
Armel }	10	—
Loïg }	9	—
Hervé }	9	—
Tugdual } ar bihanan, d'ean bleo melen hir.	7	—
Fanch Lagadeg, mevel aotrou Kerlan.	50	—

Ar c'hoari a dremen 'n eur zal, e maner Kerlan.

Al leuren c'hoari a zo eur zal-dibri, enni eun dôl grenn ha kadoriou. War an dôl, eur c'haër a voked brug, eur chaden montr en aour, eur banerig vras da zastum bruzun vara. 'Vit kaërat ar zal, eur c'hrusift, skeudennou ar Werc'hez ha sant Ervoan.

DIVIZ I

FANCH

E-unan eman pa zigor ar c'hoari. Er banerig a zo restajou bara. Fanch a zo diskabel, ha gwisket an euz war lein e zilhad pemdeiek eun davanjer koten glaz, 'vel 've gant mevelien ar vourc'hizien; ober a ra neuz da ziboul-trennan an arbebeuri gant eur skubeleennig plu, a zo gantan dindan e gazel. Goude, e teu war diarôk al leuren c'hoari hag e lavar:

A fe ! talori, jolori, hailhach a ve graet d'in ma gwalc'h gant nied (1) ma mestr !... Amzer milliget !... Oh ! ya, amzer milliget hini konje ar vugale ! Eur miz penn-da-

(1) Pe: e nizeh.

benn da dabital, da gounnari, d'ober gwad fall !... Bep bloaz, d'ar mare-man, eus Kerbig, Kervran, Kervoualc'h, e teu aman eur vanden krennarded bihan.... laret 'vefe eur vanden vrini digouezet war eur park neve hadet...

Nag a stlabe, nag a draillhou a reant !... Nag a zismantrou 'ta ! (*Diskou'ra ar banerad restajou bara*). Nemet ze goude lein an duchentil vihan !... Ha ! n'eo ket boued groz a ve zervijet d'e ! Ha, nan !... hini eus ar flouran, na laran ket ! Kouignou, gwastel, viou, riz, krampouez.... lardet... mar plich !... Ya, krampouez, dreist-oll ! True am euz ouz ar vatez, ar baour kez Marc'heit ! Nag a vo red d'ei token he zuilhen, lardan he filig, asten ar brest gand he rozal ha rei bec'h d'he astel-grampouez !...

Mar na vije ken !... Mez, nag a zizurz a reont el lojeiz-man !... Ouspenn, na lezont tamm peoc'h ebet gant ser-vijer mad o eontr koz; bemde emaint o c'halorial, o huchal en e ziskouarn paour, pe o c'hoari d'ean eun dro-gamm bennak !...

DIVIZ II

FANCH, ARMEL, GWENOLE, TUGDUAL.

ARMEL

Fanch ! Fanch !

FANCH

Petra 'zo c'hoaz ?

ARMEL

A ! ma Doue ! deut buhan !

FANCH

Petra 'zo 'ta ?

ARMEL

Deut, deut buhan, buhan !

FANCH

Buhan !... da belec'h ?

GWENOLE

Da graou ho konifled bihan !

FANCH

Sell !... perag ?

GWENOLE

Deut bepred !

FANCH

Bepred !... bepred !... mes, c'hoaz eur vech, petra 'zo ?

GWENOLE

O ! pebez gwaleur, Fanch paour, unan eus al loenedi-
gou brao-ze 'n eus 'n em lazet !!...

FANCH

Ah ! boued ar c'hroug !

ARMEL

(*N eur c'hoarzin*) Al loen mad l. 'N em lazet 'vit
rei d'ac'h e groc'hen.....

TUGDUAL

D'ober eur boned tom da dremen ar goanv braz !
(*Armel, Gwenole 'ha Tugdual kwit 'n eur c'hoarzin
krenv :*

Ha ! ha ! ha !

FANCH

(*N ober tres da vont war o lerc'h :*) Non din pes-
ked ! Koz c'houiled dero !

DIVIZ III

FANCH (*e-unan*).

A ! Konje milliget !..... Konje milliget ! Pegeit amzer e
pado ? Petra 'zeuin, mar n'em lak ket Doue en tu ga-
nin ?... Petra d'ober ? Mont da 'n em glemm d'am mestr ?
.. N'an ket !... n'an ket ! Kement e kar e nied !... e « nied
bihan ker », 'vel a lavar. O ! karet a ra ar vugale...
'vel ?... 'vel eun tad-koz,... ar pezh nan eo ket, dre c'hraz
Doue !... Mes chik ! rag eman o tont !!...

DIVIZ IV

FANCH, AOTROU KERLAN.

KERLAN

Ah ! Fanch, te 'zo aze ?

FANCH

De mad, aotrou !

KERLAN

De mad, Fanch kez ; zavet eo ar vugale ?

FANCH

Mar d'int zavet ? Na glevet ket ane o trouzal dre aze ?

KERLAN

Gwelomp, Fanch ; mui a deneridigez evite ; ni 'zo
bet bugale ive.....

FANCH

(*Oulan e-unan*) Ha c'hoaz ec'h oc'h, ma mestr ker !

KERLAN

Debret eo o lein ?

FANCH

Petra ? Debret ? Ya, kredi 'ran, ha hep marc'hata : pa
oan et d'ho zerviji, 'oa lonket ar c'hrampouez ha lipet
an aman !..... Na chom deuz o zrenv nemet ar bara-man.
(*Diskoëz ra ar restajoù d'an aotrou*).

KERLAN

Bara torz.

FANCH

Bara mat, aotrou, bara re vat da deul d'ar filiped !

KERLAN

Gwir eo, Fanch. Laouen 'on o welet gant pegement a
aked a pleet gant traou ho mestr..... met chillaou.....
Ma mignon. Ar Guodet 'zo deut hirie d'e vern. C'hoant
am euz e welfe, arôk pred, ma nied bihan, hag e rofent
d'ean eun tanva eus an traou gaer a zeskont e skol ar
barz Pludir. Ya, c'hoant am euz e larfent unan bennag
eus ar barzonegou o deus desket, hag e kanfent o c'haë-
ran zoniou. Evelse 'rin daou daol gant eur men : plija-
dur d'am mignon, ken sod gant ar vugale.....

FANCH

(*Oulan e-unan*) Nan sotoc'h 'vit ma mestr !.....

KERLAN

Ha muioc'h a galon d'am nied da zeski pa zigoro ar
skol adarre.

FANCH

(*Oulan e-unan*) Ra tigo buan !..... Ra teuo buan
buan an de-ze !..... en aotromobil,... en éroplân !...

KERLAN

Fanch, lak eta eun tamm utz er zal-man, ha me 'ya
da glask ar vugale.

FANCH

Mat, aotrou.

DIVIZ V

FANCH (*e-unan*).

Barzonegou... ha... soniou ? Mari-oll-biskoas ! Awalc'h e huchont dre aze !... ha n'e ket 'vit netra ! Nan, nan ! Ker a gousto d'am mestr c'hoariou e nied. Hen gwelet a ray. (*Kavet a ra ar c'hadoriou stag an eil ouz eben*) Petra 'ta ra d'ar c'hadoriou-man ?... Unan c'hoaz eus o zroiou kamm... A ! Konje milliget !... Konje milliget !

DIVIZ VI

FANCH, KERLAN, AR VUGALE.

KERLAN

Bugale, er skol, sur on, 'c'h eus disket barzonegou vrezonek e-leiz ?

AR VUGALE

Ya, ma eontr !

BRIAG

Re zispar !

KERLAN

Pere 'ta ?

BRIAG

« Iann ar Pôtr mat » !

ALAN

« Ar Bolez hag ar Voualc'h », gant *Gab Liskildry*

FANCH

(*Oulan e-unan*) Kanfartik Kervoualc'h !

HERVE

« Ar Gazig hag ar Big », gant *Laouik*.

FANCH

(*Evel touchantik*) « Ni ker » Kerbig !

LOÏG

« Labousig Breiz », gant Marianna Abgrall.

TUGDUAL

« *Teden ar bugel* ».

KERLAN

Mat ! mat ! bugale. Gant plijadur e welan n'hoec'h eus ket kollet ho amzer er skol. Ma ! chilaouet : an Aot, ar Guiodet 'zo deut d'am gwelet. C'hoant am eus e welfe ac'hanoc'h arôk pred hag e larfec'h d'ean unan eus ho kwerziou vrezonek kaër. Laret d'ean eta « *Labousig Breiz* ». Gwelet etrezoc'h piou e laro, ha me 'ya da ziarbenn an Aot, Ar Guiodet.

(*Da heuith*).